

YF_0131_Son Soazig

Selaouet hag e klevfet ha c'hwi a glevo kanañ
Ar zon-mañ a zo bet savet a-nevez evit ar bloaz

Nag ar zon-mañ a zo savet gant ur wreg deus ar vro
C'houlan ket chifoki anezhi o tont da laret he ano

Bez eo hi bet en iliz dirak ar zakramant
Eno he-deus en em brometet d'ur martolod yaouank

En em brometiñ o-deus graet dirak an Aviel
Vijent bet fidel o-daou tre da vetek mervel

O na hen memez-tra dezhi ma 'n-eus laret
Deuzoudon Fransoazig paour 'po ket a boan spered

Me a zo un den a feson, un den a galon vat
Ha deus an dud respectet eo ma mamm ha ma zad

Abaoe an oad a bemzek vloaz dindan ar gouarnamant
E servijan ar republik gant ur galon gontant

Pa oan o teskiñ ma micher e-barz ar vusianed
E oan deus ar re gentañ gant ar vartoloded

Na da bemp bloaz warn ugent pa oan bet dimezet
"a peu près" d'ar memez oad e oan gant ma 'fried

Setu me am-boa sonjet ober c'hoazh ma c'honje
Evit kaoud ma retred evit bezañ euruz goude

A-benn eizh deizh goude e eured 'heves d'e vatimant
Ha lesken Fransoazig paour gant he zad hag he mamm

A-raok monet da bartial en-doa laret dezhi kenavo
Kenavo 'ta Fransoazig pedit Doue evidon

Pedit Doue evidon, Intron Varia Arvor
D'am diwall deus peb malheur keit ha ma vin war ar mor

Pa vin-me war ar mor bras en danjer ma buhez
C'hwi a vo 'ta Fransoazig kousket brav en ho kwele

O kerz hardiz ma 'fried, kerz hardiz d'an arme
Ma am-bo sonj ac'hanout bep eur bep moment

Te a skrivo din ul lizher ha me a resproto
Ha me a laro dit an neventiou deus ar vro

Ecoutez et vous entendrez et vous entendrez chanter
Cette chanson qui vient d'être faite cette année

Cette chanson a été faite par une femme du pays
Je ne peux pas la vexer en venant dire son nom

Elle a été à l'église devant le Saint-Sacrement
Là elle s'est promise à un jeune matelot

Ils se sont fait promesse devant l'Evangile
Qu'ils seraient fidèles tous deux jusqu'à la mort

Il lui a dit la même chose
De moi, pauvre Soazig, n'ayez pas l'esprit en peine

Je suis une personne comme il faut, un personne de bon
coeur Et mon père et ma mère sont des gens respectés

Depuis l'age de quinze ans sous le gouvernement
Je sers la république d'un coeur content

Quand j'apprenais mon métier au milieu des musiciens
J'étais dans les premiers des matelots

A vingt-cinq ans quand je me suis marié
J'étais à peu près du même age que mon épouse

Voilà que j'avais pensé faire encore du service
Pour avoir ma retraite et être heureux ensuite

Huit jours après ses noces, il rejoignit son batiment
Et laissa la pauvre Soazig avec son père et sa mère

Avant de partir il lui dit au revoir
Au revoir donc Françoise priez Dieu pour moi

Priez Dieu pour moi, Notre-Dame d'Arvor
De me protéger de tout malheur tant que je serai en mer

Quand je serais sur l'océan, ma vie en danger
Vous serez donc Françoise bien endormie dans votre lit

O va hardiment mon époux, va hardiment à l'armée
Je penserai à toi à chaque heure, à chaque moment

Tu m'écriras une lettre et je te répondrai
Et je te dirai les nouvelles du pays